

(310)

Guerr
Ar Varqizes de Grange.

Var tou : D'emp. ni oll brema, va breudeur.

Mar plich ganec'h e selaoufet
Ur verq so neve composet,
Pitoyabl, carguet a drue,
Grêt da Varqizes de Grange.

Pemneres voa, pa na voa gen,
Heritours d'e oll moyen;
Pa varvas e zad diganti,
E consultas prest tud e zi.

D'e c'hass da Baris d'ar studi,
Da zisqi dei e c'hademi,
E c'hademi hac ar c'hadang,
Desqi parlant gant an noblang;
Ar c'hadang hac e c'hademi,
(311) Desqi parlant gant pepini.

Tre pèvarzec vloas ha pemzec
E paris e voe courantet
E demerzi d'un den galant,
Castel an Idol puissant.

Neuze e voe grêt an eured
Gant calz a enor ha respet.
Tri mis ez eo padet an dang,
Ar solennite en noblang.

Ar solennite en eured,
Bisitou o tont d'o quelet;
Mes gementse ne bad get pell:
Mont reng ar marqis d'ar brezel.

Pa voa deus ar goad huella,
En a reng marcha da guenta.
An Itron a bede Doue
(312) Erit e fried nos ha de.

Erit e fried nos ha de,
Ma teuje d'ar quèr adare;
Erit e fried nos ha de,
Ma tisgen un cel deus an èe.

Gen a zisgen prest un cel guen,
A lavaras dei evellen:
Itron, chenchit ho pedemou,
Rac ar Marqis a so maro.

Chenchit a beden evitan;
E tan ar purgator e man.
An itron en em denn d'e bro,
O touguen modest e c'hanvou.

Seiz vloas ez eo bet intanvez,
Gen a deus marqis de Grange;
Ne c'houlen get e refusi,
(313) Gant aoun da gavet fachiri.

Grêt e voe ta an eil eured,
Gant calz a enor, ha respet;
Tri mirz ez eo padet an dang,
Ar solennite en noblang.

Ar solennite en eured,

438

Bisitou bemdez a zentet ;
 Mes gementse na bad get pell ;
 Mont renq ar marquis d'ar brezel.

Pa voa deus ar goad huella ,
 E ranqe marcha daquentã .
 Emã endoa ur breur beleg ,
 Hac en carg a soign e-bried .

E bried hac e rugale ,
 Vel pa vije er quër gantê ;
 An diaoul a deu, dre valeur ,
 Da denti ar fals-protecteur . (314)

Ar maleurus a query d'e c'hamb ,
 Gant ebropisiou insolant .
 An den fall a glasq manq derzi ,
 Pa ne ma ar marquis gantê .

Debonjour d'ec'h, charmant itron ;
 Hac er so joais ho calon ?
 — "Eleal, emei, honestamant ,
 » Pa na ma ar marquis present .

» Penos er'h elfen beza ceder ,
 » Pa ne ma ar marquis er quër ?
 — "Va c'hoar-gaer quër, mar an c'heret ,
 » Ur nosvez ganen e cousqet .

» Cousqit ur nosvez en c'hichen ,
 » Ha m'ho caro da rirvigen ;
 » Cousqit ur nos deus va c'hoste ,
 » Ha m'ho caro hed va bue . (315)

» Ur nos pe diou hep gen, itron ,
 » Ha m'ho caro a greiz calon
 — "Pe c'houi so meo, pe n'en doc'h get ,
 » Pe tentet gant an drouc-speret ?

— "Hit quit demeus va c'habinet ,
 » Rac gant an diaoul oc'h possedet .

» Ma vouife ar marquis, va fried ,
 » Oc'h ingrateri en andret ,
 » A dorfe d'ec'h hoc'h izili ,
 » Balamour d'oc'h affronteri . »

D'e gambr e zeo buan redet ,
 Da scrifa ul lizer n'en laqet ;
 Da scrifa il lizer en e c'his ,
 Da gass d'ar brezel d'ar marquis .

Laqet en deveus pendaben
 E rê 'n itron nosveziou venn , (316)
 C'hoari an dinq hac ar c'hortou ,
 Ha drouc implija e madou .

E voa sot bras gant tud e-zi ,
 Bete gant potret merchossi .
 P'erruas al lizer gantã
 Voa en ur gombat ar vrassa .

N'alle get dont ractal d'ar quër ,
 Betec achui an affer ;
 Mes er quër pa voe erruet
 Oll dud e di n'eus saludet .

A doliou treid ha façadou
 Eo e salute an Aubrou .
 Hac an itron, pe deus guelet
 Ar goler vras eus e fried ,
 E deus galvet e demerzel ,
 A voa c'hoas carzi ur buquel .

E demerzel, p'eo erruet, (317)
 Var e daoulin eo prosternet :
 — "Va zad, petra so c'hoarvezet
 Ma zoc'h er quis-se coleret ?

Teir façad a roas derzi ,
 Hep caout compassion outi ;
 — Gery aless e b'êr affer ,
 Ne varn get did eus va c'holer .

An itron neuze glac'haret,
 O velet coler e fried,
 E deus lavret d'e demerzel:
 Deus ganen d'an c'hamp, va buguel.

Demp ni da scrifa ul lizer
 Da gass de vam da Landreguer,
 Da gass ha d'e vam ha d'e dad,
 Da zont d'en laqat en reiz mad.

(318) Hac e vam bouar, p'eo erruet,
 Var edaoulin eo prosternet:
 Va mab, me meus bet ganec'h poan
 Deus ho mezur, pa voac'h bian.

Brema c'houi voaldret tud ho ti,
 Bete potret ho merchossi....
 — « Ar botret se a so friant,
 » Ha va fried so meurbet coant.

Va mam, hit, en em retiret,
 Rac ho sgei na c'houlennan get;
 Mes m'antrefen em c'habinet,
 Me losqfe ar goad da redet.

Salocras, va mab, na reot get,
 Rac ar goad deot neus ho tromplet;
 Rac va merc'h-caer, erit giirnon,
 So ur vreg meurbet a fezon.

(319) Pa voant diouz an daul o coannia,
 E lavar d'e vreg an dra-mâ:
 « Itron, buan n'em breparet
 » Da chom er gamp-mâ da gousquet.

Neuze esao ar forç, ar c'hri,
 Gant an itron ha tud an ti:
 Hac o qimiadi gant angen
 Deus e buguel da virvigen.

Deit, va mam-gaer, va alc'hoesiou,

Teulit plêt mad d'an tenzorion;
 Ha soignit mad va bugale
 A vo minoret gent an de.

An itron er gamp erruet,
 D'an daoulin eo en em stringet:
 « Santez Rosa, va maerones,
 » Va preserret vit un nosvez.

(320) » Va preserret evit fete;
 Fennos me gollo va bue.
 N'oa get e guer peur-achuet,
 Ar marqis er gambr so antreet.

— « Abredic bras oc'h prosternet;
 Erit c'hoas n'imp get da gousquet....
 — Va fried pasour! va excuset,
 Vel a leverot e vo gret.

Grêt vo evel a zeziret,
 Pa guerot ni yel da gousquet....
 Seiz tol countel a roas dezgi,
 Hep caout compassion outi.

Pa voa êru gant an eizvet:
 « Hola! emei, petra 'r sujet?
 Perac eta, pried cruel,
 Em lazit a doliou countel?

(321) Ema ar brud dre oll er vro
 E touguet ar frouez da crimou....
 — Oh! va fried pasour, c'houi so tromplet,
 Gant un teod fall ha milliquet.

Mar bec'h pardonet gant Doue,
 Va fried, m'ho pardon ive....
 Ne voa get ar gomz peur-achuet,
 Ar bèlez er gambr so antreet.

Oh! va c'hoar-gaer, va pardonet:
 Me a zo caus ma zoc'h lazet....

440

Santerz Rosa a voa en ti,
Hac abarlantas eviti :

— « Geryz alessé, den milliquet,
Gant an diaoulou da gonsortet ;
Gê buan da dan an ifern
Evit lesqi qic hac esqern .

^{an} ar marqis, p'en deus clêvet, (322)
Teir quech d'an douar so semplet.
Hron Varia an Drindet,

Caout a rin - me medecinnet !

Caout a rin - me medecinnet,
Da rentâ 'n yec'hét d'am priéd....
Santerz Rosa en respontas,
Hac evellen abarlantas :

Neus mui ezom medecinnet,
Rac e oll goad ac'heus scuillet :
Goulen pardon digant Doue
Evit un deiz e c'haout en êe .

fin .

(Vol. IV, pages 310 - 322.)
49 strophes numérotées.